


Petra eo ur Moneiz Lec'hel Klokaat Keodedel (MLKK) ?

Paperennoù eskemm int (parelezh euro) a c'hell talvezout da eskemm madoù pe servijoù en ur c'horn-bro gant tud o deus an hevelep talvoudoù :

- **adlec'hiañ an armerzh ;**
- **harpañ ar bevezerezh doujus ouzh an natur hag an dud ;**
- **kreñvaat al liammoù kevredigezhel...**

Penaos ez a ar MLKK en-dro ?




Perzhiaded

- **Ar gevredigezh :** ur strollad keodedourien (bevezerien, pourchaserien, strollegezhioù a-wechoù). Termeniñ a ra ur garta a rank bezañ doujet gant ar berzhiaded. N'eus nemet izili ar gevredigezh a c'hell eskemm madoù ha servijoù gant ar moneiz lec'hel.

- **Bevezerien :** hiniannoù hag implijerien all ar moneiz.

- **Pourchaserien :** kenwerzhioù nes, embregerezhioù, strollegezhioù lec'hel, kevredigezhioù a asant ar moneiz lec'hel.

- **Kevelerien :** strollegezhioù lec'hel, foran pe prevez, ha kevredigezhioù a harp ar moneiz lec'hel.



Amredañ a ra ar moneiz lec'hel etre ar vevezerien hag ar bourchaserien.

Ne c'hell ket ar MLKK kuitaat e gorn-bro na bouetañ ar brokerezh arc'hant. E-giz se e vez krouet pinvidigezh war an tiriad.

E-pelec'h emaomp ganti ?

Gwengolo 2015 : derou ar raktres.

C'hwevrer 2016 : krouidigezh ar gevredigezh MLK-Gwened.

Here 2016 : dibab an tiriad : Mor Bihan - tolpad Gwened.

Genver 2017 : dibab an anv : **Bizh**.

Ar strollad en em vod bep sizhun hag a gresk bewech gant tud nevez-dedennet.



War ar stern

Labour pazenn ha pazenn evit ma teufe ar moneiz er maez derou 2018 : reiñ da anaout ar moneiz lec'hel Bizh, termenañ ar steuñv kalvezel hag arc'hantel, diazezañ ar rouedadoù kentañ tud a vicher ha kevelerien.

Liammoù hag ur c'henlabouradeg startoc'h gant moneizioù lec'hel klokaat all ar Mor Bihan : Galais Ploermael, ha raktresoù moneiz lec'hel war ar stern en Alre, an Oriant, ar Roc'h Bernez ha Kistreberzh.

Hir eo c'hoazh an hent ! Deuit da gemer perzh evit termenañ ha krouiñ ur moneiz lec'hel klokaat ha keodedel e "Mor Bihan - tolpad Gwened"

Piv omp ni ?

Ur strollad keodedourien o chom e korn-bro Gwened. C'hoant hon eus krouiñ ur moneiz lec'hel evit :

- Harpañ adlec'hiadur an armerzh ;
- Kreñvaat al liammoù etre an obererien lec'hel en eur zoujañ ouzh an Natur hag ouzh an Den ;
- Sevel en un doare demokratel, ur gevredigezh kengret, lec'h ma vo :
 - dasparzhet gwelloc'h ar binvidigezh lec'hel,
 - kenderc'het hag implijet er vro madoù heberzh ha yac'h,
 - doujet ouzh ar madoù boutin ;
- Evit skoazellañ al liesseurted sevenadurel.



En em vodañ a reomp bep lun etre 6 eur hanter noz hag eizh eur noz, e ti ar c'hevredigezhioù e Gwened (31 straed Guillaume ar Bartz).

Nep hini dedennet a c'hell dont da gemer perzh pa fell dezhañ / dezhi !

Darempred :

mlk-gwened.contact@lists.riseup.net

Lec'hienn Web :

www.mlk-gwened.bzh

Kevredigezh MLK-Gwened

Moneiz Bizh



**Moneiz
Lec'hel
Klokaat
Keodedel**

Mor Bihan - tolpad Gwened



www.mlk-gwened.bzh